

BREURIEZ BREIZ
D'HE FENN-STURIER,
ANN A. KERMARKER.

War don : Santez Mari.

Chetu savet eur Vreuniez breman e Breiz-Izel,
 Da c'harza ar brezounek enn hor bro da vervel.
 Piou en deuz great kement-se? c'houi, aotrou Kermarker,
 Oc'h ober anavezout eur iez a zo ker kaer!

Mil zrugarez d'eoc'h eta, oberer ar Barzaz,
 Leun ez oc'h a zellidou, beza ho pezo c'hoaz
 O kemer dindan ho tourn labouriou ar Vreuniez,
 A zo meurbet kalounek evit divenn hor iez!

Piou en deuz great d'eoc'h sonjal nemet Doue hep-ken,
 Dont da vale Breiz-Izel enn ho tourn ho pluen,
 Evit daspugni gwerzou digant ar mammou koz
 Ho c'hane ken aliez war ann oalet enn noz?

Savit ho pennou, Breiziz, ha selaout gant splet
 Ho kwerzou koz skabellet, gant gwiegez reizet;
 Ne rit ken skouarn youzar da glevet traou ker kaer;
 Ne gollit ket ho skiant dre ma teu ann amzer.

Ne livirit ket morse penaoz ar brezounek
 A zo deut d'eoc'h a Paris, a zo brezounek c'houek;
 Stlapit han holl hep truez, evel eur c'hontamm ruz,
 Pell diouzoc'h da viken n'en deuz netra ker lu.

Aotrou Kemar ha Karis, te Iann ha te c'hoaz Skour,
 Savit breman ho moezou, c'harzit ann enebour
 A c'hoanta trec'hi hor iez, hag he c'has da netra:
 Dalc'hit mad, d'alc'hit bepret hag he renko zouza.

Deuit c'hoaz gant ho kanol, c'houi Martin ha Rannou,
 Da denna war ar gallek, kargit han a werzou:
 Taolit-ho e-touez ar bobl, c'heullit ar Gonidek
 Pa n'em lakfot da skriva, da geuz n'eo ket abek.

Unanomp holl hor moezou evit enori Breiz;
 Da enori hor Sturier, ha da serc'hel ar Feiz
 E kaloun ann holl Vreiziz; kalet mad eo ho fenn....
 C'harza rant a Vreiz-Izel ar gallek da vikenn!....

Braz eo hon anaoudegez enn ho kever, Aotrou,
 P'oc'h euz renket ho hanou e-touez hon hanoiou;
 Pedi a reomp Doue ra vo bepret gan-eoc'h;
 Ra vezo ene ho mamm er baradoz e peoc'h!!!

(Barz Koat-an-Noz).

L...